


Pleyber - Christ



KANTIK

D'AN AUTROU CHRIST

EVIT PARREZ PLEYBER

1

D'an Autrou Christ, hon Zalver, kanomp meuleudion,
 Huel, ni tud à Bleyber, savomp oll or mouesiou,
 Da batron her c'hemeraz hon tadou gant fizians,
 Ha kaout a rent joausted o chom en he zoujans.

2

Hervez m'eo d'ho bugale bet desket dre furnez,
 Doue n'eus roët sinou tost da yourk ho farrez,
 Eur sklerijen oll dinam, demens ar c'haëra sket,
 A vije dreist ar feunteun o lugherni meurbet.

4

Eus eun heveleb burzud, etouez an esklammou,
 Souden e voe nec'hamant laket en sperejou,
 o Petra vel hon daoulagad, choulennet peb-hini,
 o Pe-seurt kelennadurez, so d'haaset d'omp ni.

Dont a rejont da gompren, o feuleur mad evez,
Ar pez, uz lec'h ar feunteun, a velenit aliez :

« An Autrou Christ, emez-ho, a ro deomp eur guentel,
» He c'hoant eo bezha henc pedet gant tud fidel.

» Ar sklerijen o para ker splam, ken lugernus,
» Eo sklerijen Mab Doue, sklerijen dudiuiz,
» En doare-se p'her guelomp azioc'h an eienen,
» Meurbet e kavomp anad ar pez 'ma o kemen. »

Setu penaos e kominze hon tadou leun a feiz,
Ar garantez vit Jesus a verve en ho c'hreiz,
Selaou a rent kalonek ne lezen a vuez,
Ha dizamant e klaskent ober ho volonteiz.

Dom Halegen e Pleyber a voa neuze person,
Man-Louis a Vauduriant voa Escob a Leon,
Hag o c'houarn an Ilis, c' huf Klemant daouzekvet,
E Rom hag en oïl vroïou, meurbet a voa karet.

Galvet dirag ho Escob, out-he pa c'houlennas,
Aleiz dez-han gant aket testeni a roas :
« Guelet hon eus aniazri var ar feunteun Sinou,
» Hen assuri a reomp dre Jesus hon Autrou.

Ne holle ket an tad man'gueziek ha vertuzus,
Miret da gredi komzou ken sklear ha ken nerzus,
« Hiviziken, emez-han, el lec'h-se eus Pleyber, a vuez
» Ra viot kalz hencoret, Autrou Christ hon Zalver.

E mennos ker hon tadou, en ho devoston,
Pa deuas urz an Escob e tridas pebi kalon,
Buhan en dro d'ar feunteun, lec'h gant Doue merket,
Eun orator a zavas d'hon Zalver hfaniget.

Heno eur galloud Doue raktal n'em ziskuezas,
En eun tol-kont burzudus tud klav a bareas,
Re dal vele sklerijen, re vouzer a gleve,
Ha meur a zen afflijet var ho dreid a gerze.

Ar brud eus ar burzudou, heb dale, tro var dro,
Betek ar c'horniou pella n'em skignas dre ar vro,
Setu perag deus Leon, deus Kerne, deus Trager,
Pardonerien a deue, d'ar feunteun, heb niverz.

Sulvui ma yont, selaouet e charz an orator,
Sulvui voa d'ar garantez ho c'halonou digor,
Mes orator ar feunteun ne gontes met deg vloaz,
Da galonou tud Pleyber eun callia vanke c'hoas.

14

En amzer m'edo person Yvon a Gersulgen,
 D'an Autrou Christ eur chapel, e teujot da c'houlen,
 Scrid an aotre d'he sevel, miret soken hirio,
 Voe gant ar memez eskob sinet e Guimillio.

15

Er bloas seiz ha daou-ugent, ouспен-seitek kantved,
 Var eun dachen d'an illis, ar chapel voe savet :
 Ennhi, dre ma ref dez han, muic'h-mui pedennou,
 A Autrou Christ a graske niver he vuzudou.

16

Er puns eur verc'hig yaouank a guezas eun devez,
 D'an Autrou Christ ken buhan he goestlas he mam-gez,
 Hak an Doue 'n eus rentet ar vuez da Lazar,
 Eus drouk viras ar bughel e kreiz an oll glac'har.

17

Ar plac'hig o pardona en deiz ama gouel mad,
 Eus ar burzud a roe testenit deread,
 Douget er processione guenn hi voa skedus,
 Laouennik gant eur biled e ze da gaout Jesus.

18

O veza deut da bedi var an dachen brudet,
 Eun itron eus Montroulez a gavas ar guelec :
 Neuze en dro d'ar chapel eur c'houris koar melen
 A zisklerias eo heno voa klevet he feden.

19

Dominik, manac'h devot eus gouant Sant-Francoez,
 Ganeoc'h evit Pleyberis da Rom ye madelez :
 Hast o poa da rei kelou divar ben ar chapel,
 Ha da c'houlen eun tenzor digant an Tad sautel.

20

Ar Pab Klemant trizekvet, ar c'helou pa glevas,
 Eus a vir groas hon Zalver eun tam a aotreas ;
 Evidout, parrez Pleyber, o na kaera tenzor !
 Mil bennos deoc'h, Dominik, ha d'ar vir groas henor.

21

Eur barr-amzer goal spontus a voa deut da ziroll
 Er Frans, paotret Lusifer voa dichadenet oll :
 Laza rent hor beleien, ha diskar hon c'hroasiou,
 An ilizou a laerent e kear hag er mesiou.

22

Epad var an dud fidel ma tolent ho arrach,
 Deus ar chapel e rejont eur marc'had sacrilaj :
 An dachen a vuzudou, chapel an Autrou Christ,
 A voe guerzet didruez en eur mare ken trist.

23

An dioner bras, ha poanrus, ac'han e digouezet,
 Ne fellas ket d'hon Zalver e vije peurbadet ;
 Goude pevarzek bloavezh ho chapel, Pleyberis,
 Gant eun den mad asprenet zistreas d'ho c'hillis.



Tremenet c'hoas eur pennad he moger a fraille,
Ne vije quet ar chapel en he say heb dale,
Mes goude an oll dudi voa bet enahi tanvet,
He dilezel tud Pleyber n'o dije gouzanvet.

En eur stad ken truezus o volet anez-hi,
Ne voa nemet eur reket 'vit he aznevezi :
Autrou Person ar barrez, d'ar c'houls-se Gux Marrek,
A voe digasset dez-han sikourou galloudek.

E kreiz an oll galonou na brassa levezuz,
Pa lugernas ar chapel en he doare nevez,
O kaëra gouel er bloas-se voe gret deiz ar pardon,
An deiz-se deoc'h a blijas, Autrou Christ hor patron.

Darempred el lec'h santel a gendalc'has goude,
Ennhan tud a bep karber gent fiziaus a bede
Aketus var ho daoulin e rent tro an dachen,
Ha birvidik d'an envoù e pigne ho goulen.

Dañlou var an daoulagat hen anzaromp Jurdik,
Tud fidel o tont eno, vez brema neubeudik,
Heno mui ne vez pedet vel ma vije gwech all,
Demeus al lezirebez e zeus d'en em ziouall.

Da chapel, parrez Pleyber, ô ne zilez biken,
Ennhi diskarg da galon pa zeuio dit anken,
Ha ma tiroll adarre dervezion trubuilus,
Ped er chapel binniget da Vestr karantezus.

An Autrou Christ d'az tadou mil burzud en deus gret,
Sonj mad ne zec tam hirio he c'halloud bihannet,
Grason dit eus he chapel ra zeuio deiz ha noz,
Evit ma zi d'he veuli e gloar ar Barados.

PERMIS D'IMPRIMER :

5 Septembre 1888.

DU MARHALLAC'H,

Vicaire général.